

KANTIK

ANN

Itroun-Varia Berven

Ton : « Bale Arzur »

Diskan

*Pa vimp goasket gant ann anken,
En em erbedomp, kristenien,
Ouz Itroun-Varia Berven.*

1

Gant hon tud koz eo bet karet ;
Eur chapel gaër ho deuz savet,
Enn enor d'hor Mamm benniget.

2

Guechall, kleuz eur wezenn zero
A voaskede, gant ann ilio,
Imaj Mari, meulet er vro.

3

Itroun-Varia ann Derven,
Oa bet les-hanvet ar Skeuden :
Chenchet, hirio, eul lizerenn

4

Gant ann amzer oe diskaret
Ti diskloz eur Vamm, ken karet :
Diloj morse n'eo bet lezet.

5

A rumm da rumm, hag a bell zo,
'Gant tud Leon ha tro-var-dro,
Euz a Verven ez euz hano.

6

Goazed, merc'hed ha bugale,
A-ziaveaz Guitevede,
D'he Chapelik a zirede

7

Gwered Berven a zo kelc'het
Gant skabellou mein kizellet,
Evit diskuiz' pelerined.

8

Dizonjet eo Mesmenehy (1),
Enn he zav ema Penity (2),
Goudorik da bedi Mari.

9

Lambrusk Berven livet skeduz ;
He c'hloc'h braz a zoune skiltruz,
Pa zirollaz dispac'h spountuz

10

Dismantret ha mud a joumaz
Chapel Berven, lakeat enn noaz,
Epad tost da dri-ugent vloaz.

11

A nebeudou, nevez guisket,
D'ann iliz paour 'z euz bet roet
Tri gloc'h ; eun dudi ho c'hlevel !

12

D'ar Chandelour, p' anavezaz
Mari he flas e-tal ar groas,
Oa e Berven ar pardoun braz.

(1) Nom d'un ancien asile près Berven.

(2) Penity est un petit oratoire adjacent à la grande chapelle de Berven.

13

D'ar Werc'hez e-kreiz he galc'har,
E-harz Jezuz var ar C'halvar,
Oa eno meuleudi ha gloar.

14

Enor 'ta d'ar Skeuden nevez,
Itroun-Varia a Druez,
Hor skoazello enn hon enkrez.

15

Eur vez a ve fall-galouni,
Pa welomp nerz-kaloun Mari,
Enn hevelep merzerenti.

16

Jezus maro !... pebes anken !
Divreac'h Mari en em astenn !
Harp korf he Mab var he barlenn.

17

Ho polontez ra vezo grêt !
A lavar ar Vamm glac'haret,
Var-zu ann env he zell savet.

18

Lakeat Rouanez enn envou,
Dre-z-hi 'teu d'eompann holl grasou,
Enn draonien-ma leun a zaelou.

19

Hep gras Doue, e fazier ;
Beac'h ar vuez a zo pouner
D'ann nep a zisprij he Zalver.

20

Hir ann dervez d'ar micherour,
Kalet ar guele d'ar c'hlanvour,
Ma ne zeu Doue d'ho zikour.

21

Nerz ar boan a wash guechou ;
Gant ar zonz euz gloar ann envou,
'Vez sec'het kalz euz hon daelou.

22

Ankounac'heat frim ar goanv,
Labour kalet a gaver skanv,
Dirag eost mad pa zeu ann hanv.

23

Poan diouasket 'vit Doue
A zo tremp mad 'vit an ene ;
Krevaat, santelat 'ra ive

24

Kerzomp var roudou ar Verc'hez ;
Bepred diskuezomp karantez
Da Zoue epad hor buez.

25

Ra vezo meulet da viken
Hon Itroun-Varia Berven !
Eur zell out-hi enn hon anken !

IMPRIMATUR :

Corisop., 19^a Junii 1896.

Fr CORRIGOU
Vicaire général